



DISPUT  
HA QENTELLIU

585

~~216~~

~~111111~~

*Evit goulen ha rei plac'het da eureuji,  
peini a elleur da gana evit enem divertissa.*

VAR TON : Il nous faut pour nous divertir.

*Prof. introuvable*  
**B**onjour deoc'h oll asistantet,  
Gant joa oc'h assamlet ;  
Ne viot qet fachel evit hor guelet,  
Ni genebeut meurbet omp charmet ;  
Ne ellomp qet passeal ho ti,  
Hep dont d'o saludi.

Va mignon, gant cals a henor,  
P'oc'h deut da doul va dor,  
E saludan ho personac'h,  
Gant respet divar ho pizach,  
Ha qercouls ho compagnunez,  
Tud vrao oc'h assambles.

Ha dre sin ar groas e commançan ;

Comz ouzoc'h da gentâ,  
 Ha neuze etre peb guir gristen,  
 Commanç ordinal e bedén,  
 Qen peb ocazion eo agreabl,  
 Evit ober œuvr mat.

Hervez ma o clêvàn o parlant,  
 Oc'h eus ar zantimant  
 Da zont evit hon intourdissa;  
 Ni zo oc'h enem divertissa,  
 Hep e sonjomp e droug ebet,  
 Daoust petra eo ar sujet.

Pa velomp gement assamblat  
 A dud qer brao guisqet,  
 Oc'h eus qestion eus eur banqet,  
 D'eun dimezi pe d'eun euret;  
 Ni n'hon eus qet marteze,  
 Nemet rest a vauqe.

Va mignon dre ho paribolen  
 E tad va bled em pesu  
 Evel pa talle deus ar boq choq,  
 Dre ho complimantou em boq,  
 Guell e ve d'empêz parcou ar gentou  
 Ha d'empêz ar gentou.

Ne qer em pesu ar boq choq,

187  
 187  
 187

Na den eus a dud ho ti :  
 Ni a zo o clasq ur goulmiq venn,  
 Deut eus e c'houldri a boues penn,  
 C'houi a elfe renta ræzon  
 Anezi, va mignon.

Pa gomzit eus a bichonet,  
 Oc'h enem goal gavet ;  
 Lapousset int a gonseqanç,  
 Hac a aparchant oc'h an noblanç,  
 Nonpas oc'h payzantet,  
 Re e lipent ho beg.

Me gred ho pe c'hoant da farçal,  
 Pe d'hor choqi ractal :  
 Ar bayzantet a bep stad,  
 A brezege un dra vad,  
 Qercouls ma ra an noblanç,  
 M'o deffe en assuranç.

Ho gentel oc'h eus studiet,  
 Hac ho comzou verziet.  
 Ma vijen bet en academi,  
 Me a ræzonje couls ha c'houi,  
 Hac a denje eun taol latin  
 Ouzoc'h, dre m'oc'h ur potr fin.

E gallec hac e brezonec  
 Me respont pa ves ret

Évit e latin ne ràn qet  
 N'on qet varneàn studiet :  
 Ret el lêzel, pa ma ar c'his,  
 Gant an dud a ilis.

Ho comzou zo qen eloqant,  
 M'am daleit da bariant,  
 Petra benac oll dud va zi  
 A zo poent dezo dijuni :  
 Finissomp hor c'homplimancho,  
 Adieu eta, qenavezo.

Qent ober fin eus an affer,  
 Clêvit genén ur ger,  
 Peini a renqot da accepti,  
 Pe gommanç brema procesi ;  
 Pa zac'h bete ar parlant,  
 E paeot an amant.

Va laqat a rit estonet.  
 Certen ne sonjen qet,  
 Èm bize lec'h da gaout proces,  
 Na den eus va c'hompagnunez :  
 C'houi a fell deoc'h hor surprèni,  
 Eve coq al Leti.

Évit ne ellot qet ignori,  
 Clêvit, va c'havredi ;

Me gonto deoc'h a boent e boent  
 P'evi tra omp deut en hent,  
 Ha mar domp ama arêtet,  
 E ouzoc'h ar sujet.

Evel ma zoc'h tud a henor,  
 Deut a zirac va dor.  
 Ne fel qet din ho rebuti,  
 Nac e nep sæçon ho choqi;  
 Clêvet a garren libramant  
 Petra eo ho santimant.

Eun den yaouanq zo en hon touez,  
 Brema ezeus ur pemzec dez  
 En devoa arretet eur bares,  
 Hac a zo en ho compagnunez;  
 Bez e tle beza anavezet,  
 En e scoas e blesset.

Santout a ràn dre ho comzou  
 Hag ho complimanchou,  
 O poa defot eun dra benac;  
 M'emeus em zi eur vanden vat  
 A c'hragez couls hag a blac'het,  
 Ha n'eus nicun blesset.

Ar bles e deus 'ar plac'h-se  
 A vezo prest pare,

Hag he servicher couls hag hi,  
 Digasset-hi deomp eus ho ti;  
 Ar bêleg a vezo ho medecin  
 D'o c'houlma bete'r fin.

Evit contanti ho speret,  
 Me a ya etoues merc'het:  
 Chetu amâ unan dirazoc'h,  
 Dificil oc'h ma na blich deoc'h,  
 Eur vaouez adret ha lijer,  
 Hag a voar he micher.

En em laqât a rit e risq  
 Da gaout un affer drist;  
 Evit beza ar vreg-se en ho ti,  
 Na ellit qet dispos anezi,  
 Anes d'he goas e furnissa,  
 Pe gaout proces outa.

Me a vel, n'oufac'h qet e nac'h,  
 E fel deoc'h guelet plac'h:  
 Chetu ama eur plac'h yaouanq,  
 Chentil ha coaut, gæ ha galant:  
 N'eus goas er seis bares tosta  
 A refuse houma.

Ne qet da veza refuzet,  
 Ma vize permetet.  
 Plac'hig yaouanq, savit ho penn

Da zellet ous ar gristenien;  
 Abars nemeur gant an amzer,  
 O pezo eur servicher.

Me gred e' zoc'h re importun,  
 Chom a reot hep nicun:  
 Guelet oc'h eus ha plac'h ha greg,  
 Ha ne get contant ho speret;  
 Me ho supli da reculi,  
 Ma zamp da zijuni.

Arça eta va mignon bras,  
 Qent ma quitamp hor plac,  
 Digassit deo'amp hor plac'h nevez,  
 Gant conje he zud hag he liguez,  
 Eur mouevnat he fried,  
 Zo medebet contristet.

Goulon a reomp a galon vad,  
 Gant beamos mam ni tad  
 Hag e oll gerent Garel an dourdouz,  
 Ha Yan Guntu gant e dog plac,  
 Da vont da alais da c'haerij,  
 Da atrevi an demezi.

Qer'ho z' mignon, e comzet,  
 Q' reomp ne d'rao get;  
 Beomp seuden er ur blant  
 Me laqat ho speret contant.

O prezanti deoc'h an objet,  
Ha ne get mez e gullet.

Chetu amâ ur fumelen,  
Evel ur jiroflen ;  
N'eus na fourdilis na lavant  
Evelti qer rejouissant :  
Avancit eta, den nevez,  
Da rei an dorn d'ho mestres.

Didostait eta, va mignon,  
Eus a greis ho calon,  
Da zigemeret ho pried,  
Ha dalc'hit mat dezi bepret,  
Er c'hleved couls hag er yec'het,  
Pa viot unisset.

Ne get qer fall ho qevridi,  
N'antreot ebars an ti  
Da benn an dol d'e c'herc'hat :  
Graç deoc'h ho taou da veva erfat  
E doujanç Doue, m'ho recevo  
Er gloar goude ho maro.

FIN.

---

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN.



# CHANSON AR C'HI MOUSTACH.

*Var un ton caer.*

**P**EBES domach!  
Maro eo ar C'hi lous!  
Ne yelàn mui ar C'hi Moustach,  
Gant e vizac'h marmous.  
Er blo-mâ ezeo decedet  
Cabiten an oll barbedet  
Demeus ar c'hanton :  
Qi ar person  
Za rannet e galon  
Gant dezolacion  
Hag ar c'heus d'e vignon :  
Ne zorti mui, gant an anqen,  
Demeus e variqen.

**A** viantig

E voa maget ar C'hi  
Gant bara, yot, esqern ha qig  
Bars e Kersaintjili.

Mæs Yan Gamus, e ber amzer,  
A zisqas d'ar C'hi e vicher  
Hag e gademi.

Ne voa maryol qi,  
Hep droug comz a ini,  
Qer fidel var dro ti  
Evel ma voa ar C'hi;  
Ar chaç all a voa canailles  
E qichen Moustach qes.

Pa voa Moustach  
E ren e yaouanqis,  
En devoa an oil avantach  
Var oll Kersaintjilis.

Ar vugale, ar grennardet,  
Hag ive cals a gos grac'het,  
Gragez a sqient,

Pa remerqent

Ar Moustach var o hent,

E pedent an oil zent

D'en trei divar o hent:

Mar crient forç, en eur redec,

Var an diaoul bruillec.

Mar de Moustach  
Meprizet gant an dud,

Ne receo nemet peb homach  
 Digant al loened mud.  
 Ar moc'h, ar zaout hag ar c'hezec  
 A respet ar C'hi mastrouillec.  
 Chaç ar gigerien,  
 Pa er guelent,  
 Oll e stouent o fen  
 D'o mestr ha d'o doyen;  
 N'eur serri o riden.  
 Ma lavarënt, dre o ramach:  
 Bonjour, aotrou Moustach;  
 Ha ma rent oll ar reveranç  
 D'ar C'hi a gonseqañç.

Un dijentil,  
 Daouest d'e galite,  
 O clêvet ar C'hi o c'harzal  
 A dennas e gleze.  
 Crena rê e oll izili,  
 O tremen dre Kersaintjili;  
 Caer en devoa coach,  
 Ar C'hi Moustach  
 A zailas gant arrach  
 Tre e creis e vizach,  
 Hag en dibarsoultras.

Ne voa qet, gant diou bistolen ;  
 Evit eu eur difen.

Chaç ar c'hanton,  
 Amâ e deoc'h redec ;  
 Antreit gant reflexion  
 Ebars' parc ar Garec.  
 Oll oc'h eus bet an avantach  
 Da veza caret gant Moustach ;  
 Deut oll var un dio  
 Gant ho moechoa  
 Da ober ho cànvou  
 Da Voustach zo maro  
 Gant re gofad stripou ;  
 Hag astit prest d'en enterri,  
 Na bate mui va fri.

FIN.

---

E MONTROULEZ, e L'EDAN